

EMSAV

GENVER 1968

Niv. 13

mmmm mm m mm m mm m
mm mmm mm mm m mm m
mm mmm mm mm m mm m
mm mm m m mm m mm m
mm m m m mm m mm m
mmmm mm m mm mm mm m
mm mm m mm m mm m
mm mm m mm m mm m
mmmm mm m mm m mm m

KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 13 - Genver 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Ali d'ar goumananterion nevez	p. 2
Saunders LEWIS ha derou Emsav broadel Kembre	p. 3
"A-enep ar gelennadurezh divyezhek" (arroud)	p. 8
Saviad kouerion Vreizh gwelet gant skolidi an Devezhioù Studi Politikel	p. 9
Notennoù armerzhel (11), an armerzhioù kengladel, I. Diazezoù. Doareoù pennañ	p. 13

ALI D'AR GOUMANANTERION NEVEZ

Ur benveg-studi ha -stummañ eo da gentañ-penn ar gelaouenn Emsav. Dre-se e rank mont a-bazennoù ha displegañ resis-ouzh-resis an danvezioù a bleustr warno.

Diaes eo deraouiñ lenn Emsav o kregiñ war-eeun gant an niverenn-mañ : un darn vat eus ar pennadoù anezhi zo kendalc'h ar pennadoù embannet warlene, pe da nebeutañ ez int diazezet evit ar mennozioù hag ar yezh war skridoù warlene.

Setu perak ez aliomp ar goumananterion nevez da bourchas an dacuzek niverenn gentañ (1) hag o studiañ kent stagañ gant ar bloavezhiañ-mañ.

(1) Kas 24,00 F da EMSAV, C.C.P. 2 460 10 RENNES
 en ur venegiñ : Bloavezhiañ 1967

SAUNDERS LEWIS HA DEROU EMSAV BROADDEL KEMBRE

Unan eus saverion strollad broadel kentañ Kembre e voe Saunders LEWIS. Nat eo enta d'ar Vrezhoned anaout un tammig buhez hag oberenn bennañ ar stourmer kembreat : Canlyn Arthur (Heuliañ Arzhur), hag a bourchasas diazezou d'an Emsav broadel du-hont evel ma reas levr Roparz HEMON : Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh en hor bro.

Roomp da gentañ un nebeut notennoù diwar-benn buhez an den. Ganet e voe Saunders LEWIS e here 1893 e Wallasey. Pastor e Bro-Saoz e oa e dad ha kembraeg ar Bibl, da lavarout eo ar yezh unvan, a veze komzet er gêr; yezh unvan e voe enta teodyezh ar bugel. Goude bezañ bet skoliet en un ensavadur prevez e krogas Saunders gant studioù Skol-Veur e Liverpool, e Bro-Saoz. Ofisour e voe e-pad ar brezel-bed kentañ, etre 1914 ha 1919, er "South Wales Borderers". Ober a reas e vad eus e chomadenn e Frañs evit deskiñ galleg ervat. Goude bezañ peurechuet e studioù e Skol-Veur Liverpool e voe anvet da gelenner e Skolaj ar Skol-Veur en Abertawe e kreisteiz Kembre e 1923. Arbennikaat a reas neuze war lennegezh kembraek ar Grennamzer. Eno e chomas betek 1936 : er bloaz-se e kemeras perzh a-gevret gant ar pastor VALENTINE ha D.J.WILLIAMS er gwalldaol a voe kaset da benn a-enep da aerborzh-brezel saoz Llyn. An tri brogarour kembreat o doa en em zaskoret d'ar bolis goude bezañ tangwallet unan eus tiez prenn an aerborzh. Ar varnerion a Gembre bet karget eus an afer a nac'has reiñ un disentez dezhi. E Bro-Saoz eo e voe barnet an tri brogarour d'ur bloavezh toull-bac'h. Ouzhpenn-se e kolle Saunders LEWIS e o'hourc'hwel er Skol-Veur ha n'en adkavas nemet diwezhat war-lerc'h an eil brezel-bed. Etre 1925 ha 1938 avat e voe rener ar Strollad Broadel. E-pad ar brezel e tisplegas bep merc'her savboent ar vroad-elourion e-barzh ar gazetenn gembraek sizhuniek Y Faner. Lod eus e bennadoù zo bet adembannet en ul levrenn talbennet : Ysgrifau dydd merc'her.

Ret eo kounañ amañ e voe Saunders LEWIS ur skrivagner kembraek da gentañ; romantour, skridvarnour ha saver pezhioù-c'hoari (hini pe hini eus e oberennoù zo bet skignet gant ar skingomz hag ar skinwel kembraek). Ur perzh dibar eus ar C'hembread-se a ranker notañ ivez : en ur vroad protestant evit ar pep brasañ ez en em reas katolik, - diwar ziv luskenn, war a hañval : da gentañ, dre ma oa bet Kembre katolik en amzer an dishualded, er mare m'edo he lennegezh o vleuniañ hag o levezonañ Europa-a-bezh; alese, evit diskouez pebezh pouez a roe d'an unvaniezh speredel en ur vroad; d'an eil, diwar atiz e lennadurioù gallek : a-c'houde ar brezel bed kentañ e kemeras ar pleg da lenn skrivagnerion c'hallek katolik; darn anezho a oa ivez hengoungarourion ha se a ziskler an orin eus mennozioù 'zo gant ar skrivagner. Bezet pe vezet, ar gatoligiezh zo bet evitañ an tu da bellaat diouzh ar bed saoz en doa sammet an disivoud war e vro; e zigenvezet he deus en e vro avat hag en abeg d'an dibab-se e rankas en diwezh, evit darn, reiñ e zilez eus ar Strollad broadel e 1938.

Klask a raimp bremañ elfennañ oberenn Saunders LEWIS a voe diazez Emsav broadel Kembre. E 1938 e teuas Canlyn Arthur er-maez. E gwir e voe amparet al levr, evel hini Roparz HEMON, diwar bennadoù distag embannet a-raok da geñver an degouezhenn-mañ-degouezhenn. Evel-henn e c'haller diforc'hañ al luskoù reiz pennañ :

1) Diwar-benn ar yezh ez erbed start an unyezhegezh. Nevez e oa kement-se e Kembre d'ur mare ma kave d'an holl e oa a-walc'h an divyezhegezh evit saveteiñ ar c'hembraeg. Mar chom ur yezh diret e rank mont da get, eme Saunders LEWIS. Hep unyezherion ez eo barnet ur yezh d'ar marv; ma ne c'hell dreistbevañ nemet evel yezh lennegel e teu da vezañ ur fetichenn ha koulz eo dilezel anezhi. Nac'hañ a ra ivez difenn ar yezh evit ar yezh. "Ar yezh zo anezhi evit an den" emezañ spis. War un dro e c'hell bezañ un arm da stourm a-enep d'ar gevalaouriezh saoz.

2) Ar Stad. Dre vras ez eo bet levezonet Saunders LEWIS gant reiz-

ourion gevredigezhel kristen eus Bro-C'hall. Evitañ ez eo ar Stad ur gevredigezh a gevredigezhioù. An hinienn entan hedeus darempred gant ar Stad nemet dre hanterouriezh ar "c'horfoù etre" a wir prevez. Rak-se ivez e ro pouez war un dro d'ar strolloù o deus sammet warno difenn ar yezh (roll ar Stad eo o harpañ) koulz ha d'ar c'hweluniadoù pe c'hoazh d'ar pennadurezhioù ha d'ar mererezh lec'hel : fellout a ra dezhañ fiziout enno ar garg da reoliñ an armerzh koulz hag an deskadurezh (1). Un diforc'h a ra enta Saunders LEWIS etre ar Stad hag ar vroad; ar vroad hec'h-unan dre he buhez a grou an Istor. "Creu hanes yw nod angen y genedl wareiddiedig" (krouiñ istor eo pal didec'hus ar vroad sevenaet).

Dre vras n'eo ket douget Saunders LEWIS da aotren re a veli d'ar Stad, - bepred diwar levezon ar veizourion c'hall gatolik kempred dezhañ ha na oant ket techet neuze d'ar gevarzhelezh evit abegoù a bep seurt.

War zaou boent all e c'haller merkañ levezon an hengoungarourion c'hall. Lakaat a ra da skouer an tiegezh e diazez ar gevredigezh; pouez a ro a-hend-all d'ar vrientinion en ur vro, - dre m'en doa bet tro moarvat da studiañ barzhed kembraek ar Grennamzer o doa gallet sevel o barzhoniezh dindan warez ar vrientinion gembreat a neuze. Keuziañ a rae dre ma tiouere Kembre arnevez hevelep brientinion : int hepken a c'hallfe reiñ lufr d'ur sevenadur broadel.

Daoust ma tangwallas ar broadelour aerborzh Llyn ha ma asur a-du-rall e tle pep Kembread bezañ prest da reiñ e vuhez evit ar vro diouzh ret, ez eo gwell gantañ hentennoù ar peoc'h a denn da grouiñ youl ha kendrec'herezh e-touez an dud eget re ar brezel a zo drastus ha koustus-bras d'ar vro peurvuiañ. Enebet en deus bep tro ouzh ar ficherion freuz diatebek ha na reont nemet degas rouestl en aferioù ar vro.

Arabat e ve avat ober eus Saunders LEWIS un hiniennelour. War e veno e rank ar barzh hag an arzour bepred kaout ur roll kevredigezhel, - evel m'o doa er Grennamzer end-eeun.

3) Kravez. Evit Saunders LEWIS ez eo gwriziennet Kembre er grist-

eniezh. Kyfreitheu Howel Da (Lezennoù Howel Dda), da skouer, a oa awenet gant an Aviel. Kembre enta er c'heñver-se a zle chom feal dezhi hec'h-unan. Padal e vefe arabat krediñ e tle ar c'hristen degemer n'eus forzh petore beli : e zlead eo er c'hontrol en em sevel ouzh kement galloud direizh. An dispac'h enta a c'hell bezañ dlead ar c'hristen.

4) Europa. Loc'hañ a ra ar skrivagner diouzh ar savboent hengoun-
gar, - hiraezh d'un Europa unvanet gant an Iliz hag ar gristeniezh
er Grennamzer, - evit hetañ diazezadur un Europa unvan adarre,
a-drugarez d'ar broadoù bihan adsavet. Dibab a ra enta Europa e-lec'h
ar c'Commonwealth evel framm etrevroadel : ne c'haller ket, emezañ,
sevel un unded armerzhel pa n'eus ket da gentañ a unded douaroniel.
Ret eo notañ e wele Saunders LEWIS en etrevroadelezh ar c'hweluniadoù
un tu da ziraez unvaniezh nevez Europa.

5) Armerzh. Amañ e c'hellomp diforc'hañ meur a savboent : penn-
sturiennoù, labour-douar, kenwerzh, greanterezh.

Unan eus pennsturiennoù Saunders LEWIS eo e tle pep hinienn
tizhout he rezid keodedour er vro dre ar berc'henniezh prevez. A-se
e tle an domanioù bras bezañ diframmet dre berzh lezennoù aozet
a-ratozh evit aotren d'an holl kaout un tamm douar, - hep diberc'h-
ennadur avat, war dermen hir-tre neuze. Douar Kembre a zle bezañ
piaouet gant perc'henned vihan, ar re-mañ o vezañ strollet e-barzh
kevelourioù.

A-du emañ ivez gant ar genwerzhourion vihan. Ret eo sammañ ar
gourstalioù hag o zrevioù gant taosoù ken ponner ma teuy da vezañ
digorvoüs a-grenn sevel un trede trev, da skouer.

Erfin, ret e ve lakaat ar vicherourion da gaout perzh e buzadoù
an embregerezhioù dre aotren kevrannoù dezho. Seurt mennozhioù zo bet
lakaet da dalvezout mui pe vui e meur a lec'h en Europa, - en Alamagn
Gornog da skouer (2).

Ur sturienn all embannet gant Saunders LEWIS eo e tle ar vro
klask tizhout an emvasterezh (3), dreist-holl e-keñver gounezerezh.

Hevelep mennad a ranker kompren en ur vro digempouezet evel Kembre sammet gant an ijinerezh ponner, - war e ziskar a-hend-all, - a zo dic'houest d'en em vagañ hec'h-unan. Hogen ivez e tle ar vro, war e veno, kenderc'hañ kement a c'hell evit hec'h ezhommoù greantel. An arc'hant a dle bezañ broadel kellies gwech ha ma'z eo gallus; ar madoù-beveziñ ivez a zle ar vro hec'h-unan o c'henderc'hañ kement ha ma c'hell henn ober. Hemañ eo an tu nemetañ da herzel ouzh un neveztrevadennadur a-berzh ar galloud-derc'hel kozh.

Erbediñ a ra a-hend-all broadelañ an arc'hantioù hag an ijinerezhioù ponner, a zo e Kembre etre daouarn kevalaourion estren. Er c'heñver-se e tle ar Stad enta bezañ pennevalaour ar vro.

Hogen war un dro ez eo prest da aotren ar c'hevezerezh frank d'an embregerezhioù bihan a vo savet er vro, war zaou ziviz evelato : reolet e tle bezañ ar c'hevezerezh gant ar c'hweluniadoù hag ar pennadurezhioù lec'hel. Amañ ne hañval ket mennoz Saunders LEWIS bezañ resis da vat.

Dre vras e vefe Saunders LEWIS a-du gant un doare steuñverezh armerzhel, rak goulenn a ra ma ve savet ur c'hengor-diorren kembreat e ve dileuriet ennañ kannaded a-berzh ar pennadurezhioù lec'hel. Evelato, en dro-mañ c'hoazh ne hañval ket e soñj bezañ fraezh-mat.

Evit-klozañ e raimp-un nebeut evezhiadennoù. Meur a wech e klot selladoù ha meizadoù ar brogarour kembreat gant re an Emsav brezhon, evel ma c'haller gwiriañ, hep mont pelloc'h, dre o c'heñveriañ gant kelennadurezh Roparz HEMON. Kembre, evel Breizh, da skouer, ne c'hell kaout nemet ur yezh, he hini. Merzet en deus ivez pouez an emvasterzh evit diogeliñ dishualded ar vro. Meizet mat en deus e tleer perzhiadekaot ar boblañs ar muiañ gwellañ e diorreadur hag e mererezh ar vro, dre hanterouriezh ar pennadurezhioù lec'hel hag ar c'hweluniadoù. Dre vras ez eo azasaet e roll-gwellaennoù ouzh emgav Kembre, - evit pezh a sell ouzh ar gounezerezh da skouer.

E gareziñ a c'hellomp avat evit bezañ amprestet darn eus e

vennozioù digant meizourion estren. Padal, o vezañ ma oa kristen ar veizourion-se, e c'halle o frederennoù bezañ degemeret aes a-walc'h en ur vro chomet kristen, - kounaomp en deus ar Strollad broadel, ar bPlaid, en em harpet kalz war ar bastored da gentañ.

Kealioù 'zo, ret eo anzav diwar dremen, zo dibleustrek a-walc'h evelato : hini ar c'hevrannoù greantel d'ar vicherourion da skouer. A-enep pep ober dre an nerzh edo Saunders LEWIS ha dre-se ne c'halle e raklun politikel, kevredigezhel hag armerzhel bezañ nemet ur roll azveradurioù war ar gevalaouriezh o ren e Breizh-Veur.

Ur rebech all a c'hellomp ober d'e reizhiad : isprizet en deus kefridi ar Stad : dianat eo chomet dezhañ he roll evit unvaniñ hag enframmañ ar vroad. War ar poent-se moarvat he deus koshaet ar muiañ kelennadurezh Saunders LEWIS, - evel m'he deus graet e Breizh ar gelennadurezh heñvel outi a oa o ren en Eil Emsav.

- (1) Er mererezh breizhveurat n'eus forzh penaos, ez eo kalz frankoc'h roll ar pennadurezhioù lec'hel.
- (2) Sl. Emdroadur meizad ar gopr in Notennoù armerzhel (8), Emsav 9/240 ha 244 pergen.
- (3) Sl. Emsav 13/30, notenn (21).

"An amzer-se a oa an amzer ma selle Breizhiz gant estlamm ouzh hor breudeur a Gembre. Netra, dreist-holl, d'o meno, n'oa par d'o skolioù. Eno e veze desket div yezh d'ar vugale : yezh ar vro, ha yezh ar vro all. Lakaet e vezemp da grediñ e oa ar vugale du-hont, en abeg d'an div yezh, div wech speredekoc'h, div wech desketoc'h eget e nep bro. ()

"M'hor bije heuliet gant evezh buhez speredel Kembre e-doug ar bloavezhioù tremen, hor bije kavet n'eo ket ar vro-se ur baradoz, nag evit ar yezh, nag evit ar skolioù. Diarvar eo un dra : emañ ar c'hembraeg o vervel. ()

"Emañ Kembre e dalc'h ar rannvroelerion. Setu a ziskler pep tra. Rannvroelezh ha divyezhegezh a gerzh dorn-ouzh-dorn."

Roparz HEMON, A-enep ar gelennadurezh divyezhek,
Breiz Atao 1925, ademb. en Ur Breizhad oc'h..., p.126.

SAVIAD KOUERION VREIZH
gwelet gant skolidi an
DEVEZHIOU STUDI POLITIKEL

E roll-labour an Devezhioù Studi Politikel emañ lakaat etre daouarn ar skolidi pennadoù-skrid o tennañ d'ar politikerezh, d'ar gevredigezh, d'an armerzh, h.a., ha goulenn diganto o flaenaat e-keñver yezh (geriadur, yezhadur, kalvezelezh) ha mennoziou.

Embann a reomp amañ unan eus an arroudoù bet kinniget en doare-se e 1967, unan eus ar goulennoù graet da heul, ha pemp e-touez ar respontoù aroueziusañ.

Testenn :

AN EMSA VADEGOU KOUERION EN HOR BRO

Kredet en deus meur a hini warlene e oa prest gwerin Vreizh d'en em sevel evit kaout un tammig muic'h a amann war he bara.

Krediñ e oant prest d'ober un dispac'h war zigarez e raent un tammig trouz hag un tammig dizurzh a oa amoet. Er mennoziou da gentañ emañ an dispac'h, n'eo ket en oberoù. Hogen, dres, daoust ha mennoziou o doa ar gouerion warlene ? Nann siwazh. Daoust hag ur gellennadurezh o deus diwar-benn ar gevredigezh ? Daoust ha meizañ anat a reont pouez ha stad al labour-douar er sevenadur a-vremañ ? Siwazh n'int nemet ar geizh a c'houlenn gant kri an aluzon; 'm eus aon ez int sklaved atav, sklaved ha n'o deus ken c'hoant nemet sachañ un nebeut profoù digant o mistri. Hogen penaos e stourmint outo ? Ar re-mañ o deus graet o c'hontoù; an disoc'hoù anezho zo diarvar : hanter re a dud zo o vevañ war ar maez e Breizh c'hoazh. Nemet e plegfent da baeañ an dud d'ober netra ne c'hellont ket asantiñ d'un diskoulm a zo war o menno enebarmezhel.

Un nebeut promesaou zo bet graet, loar skedus al lezenn-stur istribilhet e lein oabl Breizh, ha Yann Gouer zo distroet d'ar gêr fur ha fizius. Kuitez d'ober un tamm reuz ur wech bennak adarre e-giz ur bugel mign ma ne reer ket van da selaou outañ.

Bezomp sur ne ray biken ar gouerion ur gwir zispac'h e Breizh - nemet p'o devo komprenet n'eus ket anv a vara hepken en o emgann hogen eus o dellid a dud hag a Vreizhiz.

hervez Youenn OLIER, Tonkad 62.

Trede goulenñ. - Keñveriiñ emzalc'h ar gouerion e Breizh en hor maregant emzalc'h ar vicherourion a c'hreanterezh e derou ar c'hantved-mañ. Pe zisoc'hoù a welit da stourm ar gouerion ? Renit un arzael-adur etre an disoc'hoù bezus.

Respont I.

Da'm meno evit ma teufe an Dispac'h da zisoc'hañ e ranker kaout tri zra :

- da gentañ degouezhioù dispac'hel,
- d'an eil mennozhioù resis,
- d'an trede tud spiswel ha youlek.

A) Gwelomp emzalc'h ar vicherourion :

KORNOG

RETER

a) ar frankizouriezh o ren

dislavar etre stad armerzhel ha kevredigezhel diouzh un tu hag an ensavadurioù politikel diouzh an tu all : mac'homerezh Nikolaz II; Brezel 14 "buanaer an Istor"

b) mennozhioù

dreist-holl ar varksouriezh

k) tud

Jaurès

Lenin, Trotsky

Setu perak ez eo bet gwellaet o stad. Rak mennozhioù resis ha tud speredek ha kalonek o deus kavet evit o harpañ hag o frammañ.

B) Emzalc'h al labourerion-douar :

a) a zo heñvel : stad truezus

b) mennozhioù resis) a vank betek-henn (alies gwech o renerion
k) tud spiswel) zo tud hanter vresk pe dallet gant an treuzvennozhioù gall)

K) Diskoulm :

- resisaat ar mennozhioù; da lavarout eo evit Breizh : ar Stad vroadel;

- tud kalonek, frammet start, d'o sklerijennañ pe da vihanañ d'o implijout. A-hend-all e vo tremenet lost al leue dre o fri hag e vint enket mui-ouzh-mui d'an divroerezh.

Respont II.

Da heul diorreidigezh ar greanterezh en em gavas micherourion derou ar c'hantved dindan wask un nebeut kevalaourion oc'h implijout anezho evel binvioù-labour hag o nac'h outo an talvoudegezhioù denel e oant o c'hortoz : dellid, goproù ha doareoù labour dereat, h.a.. Dizunvanet, o deus da gentañ klasket en em unaniñ e c'hweluniadoù, en hevelep doare ma weler bremañ kouerion Vreizh oc'h en em vodañ e kevredigezhioù-difenn (c'hweluniadoù gounezel).

Hir ha kriz eo bet stourm ar vicherourion ha n'eo bet efedus nemet pa'z eo en em harpet war strolladoù politikel o deus kemeret plas aotrouniezh stadel ar broioù (Rusia) pe bouezet warno (Frañs).

N'eus nemet tri hent gallus da stourm kouerion Vreizh :

- kenderc'hel gant un emgann a stourmoù rannel ha micherel rik na gaso da netra;
- klask en em harpañ war strolladoù politikel gall na c'hallio kaout nemet disoc'hoù rannel, da skouer e-keñver priz an danvezioù, met a lezo en he fezh ar gudenn wirion, da lavarout eo : lakaat anezho da vezañ lodek e sevenadur o bro pa'z int bremañ implijet evit mad un armerzh estren.
- dic'hoanag e chomo stourm kouerion Vreizh tre ma ne'n em harpo ket war ur strollad politikel breizhat en e bal sevel ur gevredigezh vroadel.

Respont III.

Disheñvel-meurbet eo emzalc'h ar vicherourion e derou ar c'hantved diouzh hini ar gouerion bremañ e Breizh. Savet eo ar gudenn bep gwech eus un emdroadur buan ha didruez er gevredigezh. Ret e oa d'ar vicherourion stourm taer evit kaout gwirioù ha surentez na oa ket anezho en derou. Klask a ra ar gouerion en em zifenn evit difenn o lec'h e buhez armerzhel Frañs. Ensilet e oa emzalc'h ar vicherourion en emdroadur an armerzh; er c'hontrol e c'haller sellout ouzh stourm ar gouerion evel ur c'hilstourm. Betek-henn n'o deus graet nemet taolioù berrbadus ha sioulaet int bet buan gant komzoù flour. Ar vicherourion o deus renet ec'hwelioù hir-tre a bade a-wechoù meur a viz, a voe gwadus alies a-walc'h. En diwezh ez eus un diforc'h pouezusoc'h c'hoazh. Stourm ar vicherourion a oa stourm ur renkad. Trec'h micherourion e mengleuzioù Valenciennes a voe un trec'h evit ar renkad a-bezh, un trec'h evit holl vicherourion ar riez. Kudenn ar gouerion vreizhat a rank bezañ sellet outi dreist-noll evel kudenn ur rannvro a-bezh ha poellekoc'h e vefe dezho stourm a-gevret gant micherourion ha pesketaerion Vreizh.

Respont IV.

Emgann ar vicherourion e Rusia e derou ar c'hantved ha hini ar gouerion e Breizh abaoe dek vloaz zo heñvel : armerzhelour eo an

daou stourm.

E dibenn an 19^t kantved o doa kroget micherourion Rusia, e Petersburg pergen, d'en em vodañ a stolloù bep sul en-dro d'ur marksour. Hogen en emvodoù-se zoken ne veze meizet ar stourm politikel nemet en dazont pellañ, ur stourm armerzhel a veze prientet peurliesañ. Lenin avat, a gemere perzh en emvodoù-se, en devoe tro da damall mennoz ur stourm armerzhelour: "Dre ur stourm armerzhelour n'ho po biken ur gwelladur gwirion eus ho stad. Ar pep pouezusañ eo ar stourm politikel. Rankout a rit ren ur stourm politikel" (kounaet gant ur vicherourez eus strollad Radchenko).

Evel m'o deus graet ar volcheviked e Rusia, Lenin en o fenn, e rankomp distrujañ mennoz ur stourm armerzhelour ha korvoiñ an enkadenn armerzhel war an dachenn bolitikel : rankout a reer politikaat ar stourm armerzhel, lakaat ar gouerion da veizañ o enkadenn bolitikel, da sellout ouzh o enkadenn armerzhel evel ul lod eus o enkadenn bolitikel.

Respont V.

Micherourion ar greanterezh e derou ar c'hantved-mañ o deus renet ur stourm renkadel urzhiet, harpet ma oant gant strolladoù frammet ha dreist-holl ur gelennadurezh resis. Krouet o deus un emskiant, emskiant ar broletaerion, ha lakaet ar gevredigezh da gemmañ diouzh o c'hoantoù, ha graet an dispac'h e Rusia.

Ar gouerion e Breizh zo frammet met n'o deus kelennadurezh ebet evit sturianañ o emzalc'h. Un emskiant a renkad pe gentoc'h a gendere o deus. An emskiant-se avat n'eo ket ergorelaet gant ur gelennadurezh.

Meur a zisoc'h a c'hell bezañ da stourm ar gouerion e Breizh. Da gentañ e c'hellont kemer un emzalc'h dispac'hel ha klask ar gelennadurezh a glot gant o ezhommoù a gouerion hag a Vrezhoned. Gallout a reont chom dall ouzh retderioù an dispac'h ha klask derc'hel d'o doareoù stourm hep disoc'hañ hag erziwezh bezañ flastret gant darvoudoù digomprenadus evito.

D'an Emsav eo da zegas dezho al lavar fraezh o deus ezhomm evel an dud all e Breizh ha da reiñ dezho an emskiant vroadel hag an hentenoù a ziskoulmo o c'hudennoù.

NOTENNOU ARMERZHHEL (1 1)

AN ARMERZHIOU KENGLADELI. DIAZEOU. DOAREOU PENNAÑ.

kenc'hlad
 Armerzhioù kengladel a reer eus reizhiadoù armerzhel ar broioù ma'z eo bet kengladekaet an douar hag ar c'hevalla pe, e gerioù all, ma'z eo bet freuzet perc'hentiezh prevez ar madoù-kenderc'hañ. An hini gentañ eus ar riezoù kengladel e voe an Unaniezh Soviedel, diwanet da heul Dispac'h 1917.

Komz a reer ivez eus armerzhioù kevansteuñvek; rak er riezoù-se e vez leviet war-eeun gant ar Stad an holl obererezhioù-kenderc'hañ ha -postañ.

Mat eo gouzout avat n'eo ket kengladel dre ret kement armerzh steuñvek a zo. Hiziv dreist-holl, er bed a-bezh e tenn an holl riezoù da steuñviñ o armerzhioù. Zoken er broioù "frankizour" e rank ar Stad krennañ war frankiz an embregerion hag o flegañ d'ur steuñv-kenderc'hañ strizh pe strishoc'h. En enep, n'eo ket steuñvek dre ret un armerzh kengladel. Pelloc'h e welimp ne oa ket steuñvek an armerzh soviedel e prantad ar "Gomunouriezh vrezel". Un degouezh dibaot ez eus aze avat.

Daou bennad a yelo ganimp da studiañ an armerzhioù kengladel. En hini kentañ e lakaimp a-wel o diazezoù damkanel hag an doareoù aroueziusañ anezho. En eil pennad e raimp un damsall war o c'hud-enoù pleustrek, war an diskoulmoù a zo bet kinniget hag ar re a zo bet arnodet, evit klozañ war an diskoulm yougoslaviat.

Diazezoù damkanel.Kelennadurezh Karl MARX

Div sturienn a roas Karl MARX d'an armerzh evel m'en meize en tu all d'an dispac'h komunour : an eil a denn da berc'hentiezh an

araezioù-kenderc'hañ, eben da reoliatadur an obererezhioù armerzhel.

Perc'hentiezh an araezioù-kenderc'hañ.

Evit MARX hag ENGELS ez eo ereet galloud ha perc'hentiezh : peogwir e piaouont ar madoù-kenderc'hañ eo e talc'h ar gevalaourion ar galloud armerzhel ha politikel. "Azon ar gomunouriezh n'eo ket freuzañ ar berc'hentiezh, met freuzañ ar berc'hentiezh vourc'hizel. E-se emañ ar gomunourion e gwir da grennañ o c'helennadurezh er sturienn-mañ : freuzidigezh ar berc'hentiezh prevez" (1). Da heul e kaver e Bonreizh U.R.S.S. an diogeladur-mañ : "An atil, ar c'hondon, an doureier, ar c'hoadeier, ar greantioù, an oberiadegoù, ar mengleuzioù glaou ha kailh, an houarnhentoù, an dourhentoù, an aerhentoù, an arc'hantioù, ar post hag ar pellgehenterezh, an embregerezhioù gounezel bras aozet gant ar Stad, () an embregerezhioù-kêr ha glad-diazez an annezadurioù-kêr hag an tolpadou greanterezhel, zo perc'hentiezh ar Stad, eleze kengerz ar bobl a-bezh ()" (mellad 6).

Reoliatadur an armerzh.

A-fet sturiadoù evit reoliata an armerzh e chom skort kelennadurezh MARX hag ENGELS. Ken e rankas ar gouarnamant soviedel urzhiañ koulz lavaret pep tra war an dachenn diwar netra. Ar skouer nemeti a c'halle talvout dezhañ oa ar steuñvekadur, anvet "armerzh brezel", renet gant ar gouarnamant alaman etre 1914 ha 1918.

Un elfenn nac'hel a dremenas koulskoude eus preder MARX en armerzhouriezh soviedel : an distaol groñs eus roll an nevid. Gant ar Stad eo e vez diferet kement tra a vez kenderc'het er vro, ha pegement, ha penaos, ha gant piv, hag e pe briz. Hevelep pennaenn a amplege dre ret ar c'hevansteuñviñ. Un trevell ramzel eo a samme ar Stad nevez war he chouk, ha pell emañ c'hoazh a vezañ diskoulmet an holl gudennoù a sav diouzh an doare nevez-se da veizañ armerzh ur riez.

Levezonoù all ar varksouriezh.

Sturienn-bal ar gomunouriezh : "da bep hini hervez e ezhommoù" (2) a empleg berridigezh an devezh-labour :

"Ne zeraou ar frankiz nemet e-lec'h ma paouez al labour graet e dalc'h an ezhom hag ar rediegezh diavaez, emañ enta, dre natur an traoù, er-maez eus tachenn ar c'henderc'hañ danvezel e-unan (). En tu-hont d'an dachenn-mañ eo e teraou bleunvidigezh galloudezh mab-den a zo dezhi hec'h-unan he fal, ren gwirion ar frankiz. Ne c'hell ar ren-se avat bleuniañ nemet war ziazez ren ar rediegezh. Da bennamplegad dezhañ emañ berridigezh an devezh labour" (3).

Sur: Ramon
E 1958 e voe direet da 7 eurvezh padelezh an devezh labour en Unaniezh Soviedel ha, hervez Raklun hirdermen ar Strollad Komunour darbennet e 1961, e tiskenno da 6 eurvezh diwar 1970, - gant un devezh vak sizhuniek, pe da 35 eurvezh sizhuniek ha daou zevezh vak. Pa lakaer e kont ar strivoù taer a c'houlenn a-hend-all an Unaniezh digant he fobloù evit buanaat kresk hec'h armerzh, ez eo ret merzout an damant-se da verraat an devezh labour evel un doujañs d'ar bennaenn varksat hepmuiken.

E "Dezvarn Raklun Gotha" e ra MARX un disparti etre ar madoù-beveziñ evit savelañ ur "glad o vastañ da ezhommoù ar gumuniezh a-fet skolioù, yec'hedouriezh, h.a.". Ar rann-se eus ar C'horvoder Broadel anvet Glad-beveziñ-kevredigezhel, keveleb ar c'horvoderioù treuzdoug er broioù frankizour, zo neoazh disheñvel e daou zoare diouzh ar c'horvoderioù kevredigezhel kornogat : er stadegoù ne vez ket disrannet diouzh ar c'horvoderioù all; lakaet e vez da greskiñ a-gevreizh gant an armerzh broadel : a-benn 1980 e vo par ar Glad-beveziñ kevredigezhel d'an hanter eus ar c'horvoderioù all.

"Savelennoù" an armerzh sokialour

Sur: Ramon
Ur wech aet ar riez soviedel en he lank, e strivas an damkan-ourion a-berzh Stad da dermenañ savelennoù ar patrom armerzh nevez krouet.

Ar "savelenn" hollekañ, graet anezhi savelenn-diazez ar sokial-ouriezh, a voe termenet gant STALIN evel-henn : "Diogeliñ ar vastidigezh vrasañ d'an ezhommoù danvezel ha sevenadurel o kreskiñ dizehan er gevredigezh a-bezh, dre ziorren ha gwellaat dizehan ar

c'henderc'hadur sokialour war ziazez ur c'halvezerezh uhel". Seurt lakadenn avat, ma ne sav ket a-enep da sturiennoù ar varksouriezh, ned eo ket sokialour dre ret; ouzhpenn-se ez eo diaes ober anezhi ur savelenn (da lavarout eo un dezrevell a geñverioù na c'hell ket youl mab-den o c'hemmañ), pa'z empleg, end-eeun un armerzh lusket gant ar youl emouiziek da greskiñ, ha mennadoù o c'houlenn emell dizehan ur galloud politikel evit bezañ sevenet.

Ur "savelenn" all, n'eur evit gwelout enni nemet ur sturienn evel an hini gentañ, eo "savelenn" diorreadur steuñvek an armerzh broadel. Hervez STROUMILIN, ez eo "kefridi an armerzh steuñvek lemel an digenfeurioù holl eus ar c'henderc'hañ". Ar mennad-se, a voe hini ar gouarnamant impalaerel alaman e-pad brezel 14, zo hiziv hini un niver bras a armerzhioù broadel na dennont ket o sturiennoù eus kelennadurezh MARX.

Ent-devoud, e tiverzer un emdroadur dizehan e kenurzh an armerzh soviedel abaoe ar pennderou, ken e sell eus ar berc'hentiezh, ken e sell eus ar steuñvekaat.

Dre veur a bazenn e tremenas dezvad ar berc'hentiezh :

- e 1917 ez embanne LENIN stadeladur an douar, ar bankoù, ar c'hevredadoù kretaerezh; fiziet e voe reoliñ ar greanterezh er vicherourion strollet e soviedoù; kement-se a-benn erlec'hiañ ur gevalaouriezh-Stad ouzh ar gevalaouriezh prevez. Betek 1918 avat e kenvevas ur gennad kevalaour reolet gant soviedoù ar vicherourion, hag ur gennad sokialour stadelet. En nevez-amzer 1918 e tivroe ar bennbregerion hag e tremene ar greantioù a zilezent dindan vererezh war-eeun ar soviedoù. A-du-rall, dindan wask an darvoudoù, - prantad ar Gomunouriezh vrezel a oa o ren, - e voe divizet peur-stadelañ ar greanterezh ha deraouiñ stadelañ ar gounezerezh;

- e 1921, e franka d'ar saviad politikel hag e tigor prantad an N.E.P. (Leviadur Armerzhel Nevez) : freuzet eo an disentez stadelañ ar c'henwerzh bihan hag ampellet stadeladur an douar;

- e 1928-29 ez adstagas ar c'hengladekaad gant e hent ha freuzet e voe da vat ar berc'hentiezh prevez;

- abaoe 1956 e verker un durc'hadur nevez : distardañ a ra dezhi ha kreskiñ a ra emrenerezh an unanennoù-kenderc'hañ (ar c'holc'hozioù pergen), war un dro gant frankiz-piaouañ hiniennel al labourerion.

Evit a sell ar steuñviñ, e voe heñvel an emdroadur :

- e 1920 ez embanne 9t Kendalc'h ar Strollad Komunour : "Adkrog an araokaad armerzhel er vro a ampleg erounezadur (4) ur steuñv armerzhel unvan". E 1921 ez eo savet ar Gosplan, pe steuñvgor, bodad stadel fiziet ennañ ar steuñviñ. Gant an N.E.P. e tistro doareoù 'zo eus an armerzh nevidek : aotreet eo da skouer ar c'hounideion da werzhañ ent-frank an eostadoù o chom e dilerc'h o c'hevrozioù (5) d'ar Stad; perc'hentiezh-Stad ez eo bepred ar greanterezh, nemet ez eo endalc'het ar renerion embregerezhioù da heuliañ neuennadurioù an nevid;

- a-hed prantad an N.E.P. koulskoude e vez arnodet kalvezderioù ar steuñviñ, hogen ne vo savelet ar c'hevansteuñviñ rik nemet e diwezh ar bloavezhioù 20;

- pelloc'h e welimp argemmadurioù all; e Yougoslavia da skouer, diwar 1950 ez embanner azveradoù a-benn kenaozañ spletoù an nevid gant spletoù ar steuñviñ, tra ma klask armerzhourion U.R.S.S. an doare da heblekaat ar steuñverezh dre e sklaeriañ gant jedadurioù kaset "evel pa vije" un nevid o ren war ar prizioù; menegomp damkaniezh KANTOROVITCH war an "dewerzhadurioù ergorel" a laka e penn-kont ar prizioù gwerc'hel evel ma tinodfent dre an nevid, hag ivez ar "batromenn armerzh steuñvek gant ur wikefre nevid ensterniet" kinniget gant an armerzhour poloniat W.BRUS.

Elfennoù stabil ar reizhiad kengladel.

Ur fazi bras e ve evelkent faltaziañ emañ an armerzh sokialour o vont diwar an hent merket dezhañ gant e ziazeourion hag oc'h

adkavout roud ar frankizouriezh. Arabat ankouaat ez eo bet ganet an armerzhioù kengladel diwar ar youl emouiziek da sujañ an holl obererezhioù armerzhel d'ar galloud politikel. Evit meizañ mat dibarelezh ar riezoù kengladel sokialour ez eo ret lakaat war-wel an elfennoù stabil a zo en o reizhiad, ha da gentañ an amkanioù a gemeront, ar meizadur eus ar galloud politikel a zaveont dezhañ.

Amkanioù hirdermen : ur patrom nevez a dud hag a gevredigezh

Evit ar varksouriezh, n'emañ ket ar pal er sokialouriezh, met er gomunouriezh, eleze en ur patrom nevez a gevredigezh, azonet evel-henn :

- dizeriadur kefridiezhoù politikel ar Stad, na voent krouet, gouez da vMARX, nemet evit difenn brientoù ar renkad trec'h;
- freuzadur ar renkadoù hag, ent-amplegat, perc'hentiezh prevez an araezioù-kenderc'hañ. Emañ ar madoù-kenderc'hañ e kengerz ar strollelezh a ra ganto hervez ur steuñverezh heboell : kevansteuñvek enta e tle bezañ an armerzh komunour;
- rannadur al labour, ma ne c'hell ket un armerzh arnevez tec'h-out dioutañ, ne zle ket bezañ ur bennaenn a sklavelezh evel en armerzhioù frankizour.

"Er gevredigezh komunour, n'emeur ket bac'het en ur c'helc'h kloz a obererezh hag e c'haller en em varrekaat war forzh petore tachenn : gant ar gevredigezh e vez reizhet ar c'henderc'hañ hollek ha roet din an tu d'ober an dra-mañ hiziv, an dra-se warc'hoazh, da hemolc'hiñ diouzh ar beure, da besketa en enderv, da vagañ chatal en abardaez, da vezañ skridvarnour goude koan, hep ma ven nepred hemolc'her, pesketaer, mesaer pe skridvarnour en tu-hont da'm flijadur" (6).

Moarvat ne c'hell ket ken ar marksour embann hevelep livadur mesaerganel eus an dazont; hogen lakaat a ra e tle bezañ lamet an disrannoù renkadel a zo etre labour an daouarn ha labour ar spered, etre kêrioù ha maezioù, etre goprou al labour embreger ha goprou al labour erounit (4). Uheloc'h hon eus gwelet ivez penaos e sell evel ur sturienn aotrounius berridigezh an devezh-labour.

- treuzfurmet e vez ster labour mab-den ha mab-den e-unan dre e labour sellet evel hent ar sevenidigezh denel emouiziek. An notennoù amañ da heul a ro a-walc'h un alberz eus ar "gevrinouriezh" varksat :

"Lakaomp bremañ e kenderc'homp e kement ha ma'z omp denion : en degouezh-mañ, ez en em gadarna pep hini ac'hanomp dre e genderc'hadur, e-unan hag e hentez war un dro. Dre genderc'hañ, ez ergorelaan va hiniennelezh, an dibarelezh anezhi; alese, pa labouran e kavan al levenez en erzerc'hadur (7) hiniennel eus va buhez, ha pa arvestan ouzh ar pezh am eus kenderc'het, e kavan levenez hiniennel oc'h anaout va fersonelezh evel ur c'halloudezh ergorel, anavezus hag anavezadus, dreist pep arvar. A-du-rall, pa biaoù ha pa arveri va c'henderc'had, em bo-me ar blijadur eeun da vezañ bastet, dre va labour, d'un ezhomme eus mab-den, ha war un dro da vezañ ergorelaet anien mab-den ha, dre-se, da vezañ roet d'un den all ar pezh en doa ezhomme. Va levenez a vo ivez bezañ bet hanterour etrezout ha gouenn mab-den, eleze bezañ bet anavezet ganit ha buhez ganit evel ur c'hlokadur da'z natur hag evel ul lodenn ret eus da vout, gouzout enta ez on kadarnaet ez preder hag ez karantez; erfin, bezañ kenderc'het dre hent erzerc'hadur hiniennel va buhez erzerc'hadur eeun da hini, eleze bezañ kadarnaet ha sevenet em obererezh hiniennel va anien wirion; va anien den, va boud kevredigezhel. Hor c'henderc'hadennoù a ve anezho kemend-all a velezourioù o taskor skeudenn hor boud" (8).

Un amkan nesoc'h : diraez ar riezoù kevalaour ar muiañ araokaet

E-barzh rakskrid Ar C'hevala e lavar Karl MARX : "Ar vro diorreetañ e-keñver armerzh a ziskouez d'ar re a zeu war he lerc'h gant skeul ar greantelaat ur skeudenn eus o dazont". Pa gemeras ar Strollad Bolchevik ar galloud e Rusia, edo c'hoazh an 94 % eus ar boblañs er gounezerezh, tra ma ne oa endeo nemet 71 % er Stadoù-Unanet. An dave d'ar riezoù diorreetoc'h ha d'ar Stadoù-Unanet a gaver dibaouez e daloù ar Strollad Komunour abaoe an N.E.P. E 1931 e lavare STALIN : "Gorrekaat lusk hor c'hresk a dalvez dilerc'hiañ. Ha faezhet e vez an dilerc'hierion. Ne fell ket dimp bezañ faezhet avat. Emañ Istor Rusia gozh holl en devoud-mañ : faezhet eo bet bep taol en arbenn ma oa dilerc'hiet (). Setu perak e lavare LENIN nebeut amzer a-raok Here : "Mervel pe diraez ar riezoù kevalaour araokaetañ"; un dale etre 50 ha 100 vloaz hon eus war ar riezoù

kevalaour. An dale-se a zleomp koazhañ dindan 10 vloaz". Hogen ned eo ket bet koazhet c'hoazh an ode dre veur a arbenn : diaesterioù ar gounezerezh soviedel, buanadur ar c'hresk amerikan a-c'houde 1960.

Meizadur soviedel ar galloud politikel

Azon pennañ ar vuhez politikel en U.R.S.S. hag er Gweriniezhoù kengladel eo unpiaouerezh ar galloud gant ar Strollad Komunour; pezh a ampleg ezvezañs pep eneberezh kefridiel hag aotreet, blinded ha dizeriadur ar c'horfoù etre evel ar c'hweluniadoù. Aes eo meizañ penaos e c'hell ar Stad, dalc'het en he fezh etre daouarn an unstrollad, aozañ kresk an armerzh dre gement hent a gav mat. Diazezet e voe ar reizhiad-se a-dennadoù etre 1917 ha 1928.

E 1921 ez en em save martoloded Kronshtadt, o c'houlenn un "trede dispac'h", en defe roet "an holl c'halloud d'ar Soviedoù ha n'eo ket d'ar Strolladoù" ha diazezet ur "Republik soviedel a'l labourerion ma ve bet ar c'henderc'her perc'henn gwirion ha piaouer da frouezh e labour". Anat eo e lakae al liesegezh politikel c'hoazh aotreet ar Strollad Bolchevik en arvar. Tra ma oa faezhet an emsavadeg, ez embanne ar Strollad divodadur an holl strolladoù all; war un dro ez entalvoudege ur reizhenn oc'h aotren argas dioutañ nep ezel o tiskouez un emzalc'h disrannus (ar reizhenn-se a dalvezas da argas TROTSKY). War un dro ivez e kondaone "ar gwariadur (9) c'hweluniadour ha diveliour" er Strollad e-unan, ha dre-se e krenne a-vras war roll politikel ar c'hweluniadoù.

Tizhet e voe un eil pazenn e-tro diwezh an N.E.P., o tisoc'hañ gant skarzhadur al luskadoù enebet ouzh leviadurezh STALIN ha gant sujadur ar c'hweluniadoù.

Live 1913 ar greanterezh a oa bet tizhet en-dro e 1926, hogen n'edo c'hoazh ar c'henderc'h gounezal nemet en hanter eus sifr 1914. Ha koulskoude, evit diorren ar greanterezh warlerc'hiet e oa ret postañ ennañ kevalaoù bras, na c'hallent dont nemet eus ar gounezerezh. Evit se e ranke ar prizioù gounezal chom izel; hogen, mar chome izel ar prizioù gounezal e tenne neuze ar gouerion da greskiñ o unanvezerezh (10), da zigreskiñ o gwerzhadurioù d'ar c'hêrioù, ha dreist-holl ezporzhiadurioù gounezal ar riez. Da heul ne oa ket ar greanterezh evit pourchas ar madoù-kenderc'hañ diziouerus prenet en diavaezvro. Ur c'helc'h-bac'h e oa. Evit e derriñ e voe kinniget diskoulmoù diseurt.

Ur rann eus ar Strollad, ar "gomunourion gleiz", bleniet gant TROTSKY, KAMENEV, ZINOVIEV hag an armerzhour PREOBRAJENSKY, a venne uhelaat c'hoazh ar prizioù greantel en ur zerc'hel an izelañ gwellañ ar prizioù gounezal, a-benn a) ober d'ar c'hevalaoù ret

d'ar greanterezh diwanañ b) rediañ un darn vat eus ar gouerion da zivaeziañ ha da glask fred er greanterezh. An hevelep leviadur eo avat a damalle MARX d'ar gevalaourion da geñver ar prantad anvet gantañ "daspugnadur kentaek". Met PREOBRAJENSKY ne gile ket ha danzen a reas zoken ar meizad a "zaspugnadur sokialour kentaek", e sell diskouez e ranke ar Stad Sokialour en he derou pleustriñ darn eus an hentoù bet gwastadet gant ar gevalaouriezh : "Lakaat e c'hell an armerzh sokialour diorren dioutañ e-unan hep boulc'hañ barregezhioù an armerzh bihanvourc'hizel, hag en e ser an armerzh koueriadel, zo anezhañ hep ket a var ur sorc'henn gilstourmus pe vihanvourc'hizel".

Ul luskad all a savas a-enep da seurt diskoulm, ar "gomunourion dehou", en o fenn BOUKHARIN, RYKOV ha TOMSKY, levier ar c'hweluniadoù soviedel. A-du edo evit postañ kevalaoù a-ziuz-kentañ el labour-douar hag en ijinerezhioù skañv (hini ar madoù-beveziñ pergen). O arguzennoù oa edo bihanoc'h er gennadoù-se eget er greanterezh an ezhommoù kevala dre unanenn genderc'het, o vezañ ma oa brasoc'h an ouzhpennad gwerzh (11) e-keñver ar c'hevala postet, e ve tu da c'henel buan an arboell ret da ziazezidigezh an ijinerezh ponner, hep kontañ al lusk roet dre an hent-se d'ar gounezerezh ha da heul d'an enporzhiañ madoù-kenderc'hañ evit ar greanterezh end-eeun. Ouzhpenn-se, e-lec'h ober un treuzdisoc'h da c'hortoz eus ar reizhiad armerzh daouek o ren e grez an N.E.P., e save kostezenn vBOUKHARIN a-du evit ma ve diazezet da vat da reizhiad an armerzh soviedel; goulenn a rae amrederezh frank ar marc'hadourezhioù, - pezh a emlege goulenn ma treistpadfe ar gennad prevez hag an nevid evel gwikefre reoliata. Evit ar gomunourion dehou e tlee ar vourc'hizelezh vihan bezañ sterniet hag implijet da adeiladiñ ar sokialouriezh. E-keñver kelennadurezh avat e oa arvarus-bras seurt mennadoù, peogwir e kinnigent dianacut siegezh anienel ar berc'hentiezh prevez hag an nevid kevalaour bet lakaet gant MARX e diazez ar gomunouriezh end-eeun.

Da gentañ e kevredas STALIN gant ar gomunourion dehou a-benn diskar an Eneberzh a gleiz hag argas TROTSKY ha ZINOVIEV eus ar Strollad, pezh a dizhas ober e miz du 1927. Neuze, e kerzu 1927, dirak 15t Kendalc'h ar Strollad, e kemeras en e du mennadoù an Eneberzh a gleiz hag o lakaas degemerout a-unvouezh. Da c'houde ez ezvevennas an Eneberzh a zehou, dre argas BOUKHARIN ha TOMSKY eus ar burev politikel e 1929. Goût a ouzer petore finvez o devoe an eneberion e prosezioù bras 1936 (ar marv evit KAMENEV ha ZINOVIEV) ha 1937 (ar marv evit BOUKHARIN ha RYKOV), tra ma voe drouklazhet TROTSKY e 1940 e Mec'hiko ma veve evel repud.

Ul leviadur heñvel a embregas STALIN e-keñver ar c'hweluniadoù. Ne ziskoueze ar re-mañ koulskoude enebadur ebet ouzh pennaenn ar c'hevansteuñviñ, hag a-du edont gant diorreadur herrek ar greanterezh. A-du-rall, endra vevs, e tiogelas LENIN pennaenn o emrenerezh ha pouezusted o roll evel reclerion ar Stad lakaet en arvar gant ar "gwariadurioù burokratel". O gwelout a rae evel hanterourion ha tredeoged "etre yoc'h ar vicherourion ha renerion hag

Articulatu

Definitive

faire dire

atebeion an embregerezhioù stadelet. Dirak ar re-mañ ez eo enta dre ret dlead ar c'hweluniadoù difenn lazioù (12) al labourerion ha, kement ha ma c'hellont, stourm da wellaat o saviad danvezel, dre reizhañ dizehan ar fazioù hag ar reñverioù o c'hoarvezout en aozadurioù armerzhel dre berzh disneuziadur burokratel gwikefre ar Stad" (13).

Koulskoude e 1929 e voe karzhet benvegadur ar c'hweluniadoù, hag ar roll lakaet dezho diwar neuze a voe hepken bezañ "lerennoù-rod" ar Strollad. E gwir e oa ar c'hweluniadoù un dañjer evit ar Strollad : kement a sol a oa dezho ha d'ar Strollad evit embann e cant leuridi ar renkad vicherour. Ne fellas ket da STALIN lezel ur stroll-gwaskañ seurt-se da gemer e greñv war ar gouarnamant soviedel na muioc'h asantiñ d'ur stourm a renkadoù nevez.

Ar steuñviñ : reoliata meurgantel an armerzh.

E yezh an armerzhouriezh e tiforc'her ar selladoù a denn d'un domani bras, evel armerzh ur riez da skouer, hag e komzer neuze eus meurgant, par meurgantel, hag ar selladoù a denn d'an tachennoù bihan, d'an unanennoù armerzhel, evel un embregerezh da skouer, hag e komzer neuze eus korrgant, par korrgantel. An armerzh kevansteuñvek o vezañ ur reizhiad kreizennet-strizh, e vez kenurzhiet ennañ an holl zivizoù, adalek ar re hollelañ betek ar re vunutañ. Daou seurt obererion ez eus enta dre vras : ar re a gemer an divizoù, hag ar re o erounez; ar re gentañ, e-kreiz ar reizhiad, o vezañ an ensavioù-bleniañ (Gosplan, h.a.); an eil re, war drobarzhioù ar reizhiad, o vezañ an embregerezhioù-kenderc'hañ. Aes eo meizañ ez eus kudennoù disheñvel-bras da ziskoulmañ er c'hreiz ha war an trobarzh. Ensellomp da gentañ kudennoù an ensavioù-bleniañ, a zo frammadurel hag arc'hweladurel.

Kudennoù frammadurel an ensavioù-bleniañ

E-keñver gwirioniezh (14) ez eo urzhiadur ar riezioù kengladel ur sokialouriezh-Stad_kreizennet; enni n'o deus an embregerezhioù dizalc'hted wirel ebet, hogen leviet e vezont war-eeun eus ar c'hreiz. Unperc'henn eo ar Stad war ar greanterezh, an adeiladerezh, an araezioù-dezougen, ar c'henwerzh a-vras hag a-vunut, ha war un darn eus

ar gounezerezh (ar sovc'hoziou), - ar pep all eus ar gounezerezh o c'hoarvezout pe eus kevelourioù (kolc'hoziou) pe eus al logelloù prevez grataet da izili ar c'holc'hoziou. Er gennad prevez emañ ivez ar madoù-beveziñ en o marc'had disoc'hel hag un darn eus an annezioù. Ar Stad avat a chom ar goprer nemetañ hag ar gwerzher nemetañ a vadoù hag a wazadoù.

E diabarzh ar gennad stadelet ez embreg ar steuñv e sturiadoù war ziv dachenn : a) kemennet e vez da bep embregerezh he c'hefridi resis : houmañ zo anezhi erounit amkanioù-kenderc'hañ hervez divizoù niverus o tennañ d'an danvezioù da arverañ, d'an dud-labour, d'ar c'halvezderioù, h.a. b) kemennet e vez ken strizh-all an treuz-dougadurioù dafar-aveiñ ha kenderc'hadoù treugel eus an embregerezhioù pourchaser d'an embregerezhioù danvezer; azonus eus an armerzh soviedel eo hevelep redierezh a-zremm en darempredoù etre an embregerezhioù. Pelloc'h e welimp un armerzh sokialour all ma ren ar frankiz dibab a-zremm e diabarzh ar gennad steuñvek.

Goulenn a c'haller petore arbenn a lusk ar renerion embreger-
ezhioù soviedel, o vezañ ma ne gont ket evito spi an helv evel en
armerzhioù frankizour (15). Ar gred dispac'helour n'eo ket bet kavet
evel un arbenn padus nag hollel; an aon rak ar c'harazoù hag
ar c'hastizoù n'eo ket ivez un arbenn kreñv a-walc'h. N'eus bet
kavet nemet an arbenn arc'hantel a gement a ve war un dro padus,
hollel ha kreñv. An arbenn arc'hantel-se avat ne c'hell ket bezañ
hini ur buzad, rak pal an embregerezhioù soviedel n'eo ket dastum
buzadoù met tizhout an amkanioù erverket dezho. Arc'hoproù eo a vez
roet d'ar pennembreger ha da holl labourerion an embregerezh, - jedet
diouzh an doare ma'z eo bet erounezet ar steuñv. Ne vez ket lezet
ar buzad e-maez kont evelkent, sellet e vez outañ evel ouzh ur
merk a veradur mat, un ditourenn a eil renk n'eo ken neoazh a-fet
barn leviadur an embregerezh. O vezañ ma n'emañ ket an nevid aze
evit hoalañ ar c'henderc'hañ etrezek ar brasañ buzad, pa rank en
enep an embreger sentiñ rag-eeun ouzh sturiadoù ar steuñv a c'hell
bezañ diemsav-kaer er par korrgantel evit e stal, e veizer didenn

penaos ne gemerer ket dre ret ar buzadoù evel ur brouenn a veradur mat, na kennebeut-all an divigadoù evel an arouez n'eo ket bet erounezet ar steuñv (16).

Eus ar Gomunouriezh vrezel d'an armerzh kevansteuñvek.

Frouezhus eo keñveriañ ouzh an armerzh soviedel a-vremañ ar prantad 1918-1921 a anver prantad ar Gomunouriezh vrezel, p'edo gwikefreoù an nevid o paouez bezañ lamet trumm ha pa labourere an embregerezhioù dindan urzhioù o tont rag-eeun eus ar galloud-kreiz.

Lamet e oa bet ar yer ar moneiz. Freuzet e vo al lamidigezh-se da c'houde, hag er reizhiad krouet gant STALIN e voe miret ar moneiz, evit daou abeg : ar benveg jederezh eeunañ eo, pa ro an tu da zewerzhañ ha da geñveriañ madoù ha gwazadoù, labour ha kevala a-dreuz d'an egor ha d'an amzer; diaes eo ivez da zicoueriñ adalek ar mare ma lezer frank pe zamfrank nevid al labour ha marc'had ar madoù-beveziñ.

Da heul, en o doa ar geodedourion o gwir da veveziñ e stumm kartennoù-lodennañ e 1918-21, eleze edont e piau d'ur barr-pourchas enlenet (17); e stumm ur barr-prenañ (18) moneizel, dienlen (17) enta, goude adsavidigezh ar moneiz.

Gant ar moneiz avat n'eo ket deuet an nevid en-dro. Mar gell ar bevezer dibab evel ma kar e-touez an traezoù a zo da brenañ, mar gell prenañ pe chom hep prenañ, n'eo ket gant dibaboù o ostizion e vez bleniet an obererion, met gant ar sturiadoù o tont eus an ensavioù-kreiz ha ganto nemetken. "Ersaviñ (19) a c'hell ar bevezer, levezonañ avat ne c'hell ket" (P.WILES).

Un trede diforc'h zo da verkañ etre ar Gomunouriezh vrezel hag ar goudevezh : etre 1918 ha 1921 (hag ivez goude 1928) e voe embreg-et gant ar gouarnamant sturiaderezh an dud-labour; er-maez eus ar marevezhioù enkadennek-se avat e vanas frank a-walc'h nevid al labour.

Ar pevare diforc'h eo ar steuñviñ e-unan. E grez ar Gomunouriezh vrezel e veze kaset an urzhiadennoù d'an unanennoù-kenderc'hañ diouzh an deiz, hep ma vent kenereet e mod ebet en ur par meurgantel :

kreizsturiel hogen nann steuñvet e oa an armerzh. E 1921 e voe krouet ur steuñvgor, ar Gosplan, a stagas da gevreañ tamm-ha-tamm an holl barzhioù digenere, da gentañ dre embann arc'hantrolloù armerzhel bloaziek; e pep derez eus ar skeul etre ar c'hreiz hag an trobarzhioù e voe savelet ur steudad mentelioù-danvezioù (20) o reiñ an tu da wiriañ kenstagded an urzhioù. Astenn a voe roet da badelezh ar steuñvoù hag e 1928 e voe embannet ar Steuñv Pempbloaziek kentañ.

Pep steuñv zo war un dro ur raklun kenderc'hañ hag ur raklun postañ; daskemmet e c'hell bezañ diouzh ret e-ser erounezadur.

E 1957 e voe azveret framm ar benvegadur--steuñvifñ. lamet e voe ugent-pemp maodiernezh gennadel sezet e Moskva; talvout a raent da azhenterioù etre ar Gosplan hag an trobarzhioù; erlec'hiet e voe outo ur c'hant a boellgorioù armerzhel rannbarzhel (sovnarc'hozioù) a voe fiziet enno blenierezh an embregerezhioù greantel. Pal an azveradur-se oa e gwirionez pellaat diouzh ar Gêrbenn ur burevrierezh-Stad a zeue da vezañ levezonusoc'h eget ar Strollad e-unan. Ur wech strewet dre an diriegezh e teue ar benvegadur-se aesoc'h da reoliñ, kouezhañ ma rae dindan evezh skourroù rannbarzhel ar Strollad. E-keñver armerzh avat ne voe ket an adframmadur-se un digreizennadur gwirion, un didolpadur hepken.

Kudennoù arc'hweladurel an ensavioù-bleniañ

Derannadur ar barregezhioù.

E pep armerzh broadel e sav kudenn dasparzhadur an danvezioù dibaot etre an arverioù bezus anezho. En armerzh kreizsturiel a batrom soviedel e vez renet an oberatadur-se ent-aotrouniek gant an ensavioù-bleniañ. Derannet e vez an araezioù-kenderc'hañ d'an embregerezhioù dre berzh treuzdougadurioù, kuit a gengreadoù kenwerzhel. Gouzañvat rik e chom roll ar moneiz, o vezañ ma n'en deus levezon ebet war an disentezioù prenañ ha gwerzhañ : talvout a ra hepken da venveg-muzuliañ ha -recliñ. Er gennad prevez e vir evel-kent ar moneiz ur roll oberiat : atizañ an obererion, poblañs-labour ha bevezerion, da harpañ erounezadur ar steuñv.

E-keñver ar poblañs-labour ez embreg ar steuñverion ul leviadur a c'hoproù tregemmat, a-benn dedennañ al labourerion war-du ar gennadoù dibourvez pe evit o broudañ da greskiñ o askoradoù.

E-keñver ar vevezerion, e vez ivez tregemmet ar prizioù a-vunut dre lakaat un taos fiñvus war sifr ar c'hengreadur. Pal nemetañ an taos-se zo kempouezañ ar c'hinnig hag ar goulenn. Amañ e kaver un azon all eus ar reizhiad soviedel : emañ ar c'henderc'hadur e dalc'h ar steuñv nemetken, tra m'emañ prizioù ar madoù-beveziñ (dre araez an taos war ar c'hengreadur) e dalc'h an nevid-beveziñ; arabat e ve evelato gwelout aze un heñveledigezh ouzh ar reizhiad frankizour : gant houmañ e tinod ar prizioù dre wikefre an nevid hec'h-unan; er reizhiad soviedel e vez diferet ar prizioù gant ar steuñverion, da lavarout eo gant ar galloud politikel, o terc'hel stad eus an nevid-beveziñ.

Gant an armerzhour poloniat Oskar LANGE e voe kinniget ur reizhiad all : derc'hel kont eus an nevid-beveziñ evit sevel ar steuñv-kenderc'hañ; dre-se e ve tu da stabilaat feur an taos war ar c'hengreadur, - bras-tre eo argemmadurioù an taos-se evel m' emañ savelet, - o lakaat, e-lec'h re an taos, argemmadurioù ar c'henderc'hañ da gompesañ neuennadurioù an nevid-beveziñ. Hogen ned eo ket bet degemeret c'hoazh an damkaniezh-se gant blenierion an armerzh soviedel.

Arbennoù-divizout an derannadurioù.

Mar'd eo ar steuñverion a zerann da bep embregerezh e lodenn a gevalaoù (aveadurioù, danvezioù krai, treugaozadoù), ha ma n'eo ket kemennoù an nevid a dalvez da ziazez evit didermenañ al lodennoù, petore diazezoù a vez kemeret neuze ? Gant pe arbennoù e vez lusket an ensavioù-bleniañ pa zivizont brasaat an obererezh er gennad-mañ-gennad eus an armerzh hag e c'horrekaat en ur gennad all ? Kemplezh-meurbet eo ar gudenn pa denn, en tu-hont d'an armerzh, da bolitiker-ezh hollet ar riez. An arbennoù anatañ a ezrevellimp amañ. Divizet e c'hell bezañ derannañ kevalaoù :

- en arbenn ma venner devoudañ daskemmoù kevredigezhel. Da skouer, postadurioù 'zo er greanterezh o doa, en tu all d'o fal armerzhel rik, un dreistpal kevredigezhel a oa kreskiñ feur ar wezhourion c'hreantel er boblañs, - an dreistpal kevredigezhel-se o vezañ e-unan emleget gant ur pal politikel. Heñveldra, trevekaerezh Siberia ha republikoù muslimat 'zo a denne da gevatalaat ar barroù-bevañ ha da unvaniñ

poblañsoù ar riez; kengladekaat an douar, da zispenn ar berc'hentiezh prevez. Embregañ dreistpaliou eo ar vicher bolitikel end-eeun ha pep gouarnamant, zoken ar re frankizourañ henn gra bemdez, met e nep riez evel er riezou sokialour ne weler an armerzh undalc'het gant al levrierezh politikel ha "dornataet" evel ur benveg da bleuskañ ar gevredigezh;

- en arbenn ma venner dizalc'hiadañ an armerzh soviedel e-keñver an diavaezvro. Bihan eo e gwirionez kenwerzh diavaez U.R.S.S., dreist-holl he c'henwerzh gant ar riezou frankizour. Etre an daou vrezel hag e-pad an eil brezel-bed e rankas bevañ koulz lavaret e klozarmerzh ha pleustriñ an emvasterezh (21). A-c'houde an eil brezel-bed he deus an Unaniezh Soviedel diorreet darempredoù politikel start gant ar gweriniezhou sokialour nevez ha krouet ganto ar Poellgor Kenskoazell Armerzhel (Komekon), ennañ Albania, Roumania, Tchecoslovakia, Bulgaria, Hungaria, Polonia, Alamagn-Reter. Aes eo meizañ ez eo sujet strizh an urzhiadur armerzhel etreriezel-se da rediezhou al leviadurezh politikel;

- peogwir e seller daspugnadur ar c'hevala evel amplegad ret ar greskidigezh. Da heul MARX, e-unan da heul RICARDO, e tegemeras an armerzhourion soviedel ez ampleg an araokaat ur c'hresk ingal eus ar gwezhiaderiou kevala, da lavarout eo eus keñver ar c'hevala ouzh ar c'henderc'hadur diwarnañ (saveleñn an askorad war zigresk). Alese ar mennadur diskouezet gant steuñverion an Unaniezh Soviedel da reiñ lañs d'an ijinerezhioù o kenderc'hañ kevala kentoc'h eget d'ar re oc'h oberiañ madoù-beveziñ. Arzalet eo mui-ouzh-mui avat an arbenn-divizout-mañ, ha gant an armerzhourion soviedel o-unan. Diwar stad-egoù hirdermen riezou ar C'hornog e teu a-wel hiziv ez eo kendalc'hel ha zoken digreskus ar gwezhiader kevala;

- peogwir ez eo marc'hadmatoc'h an danvez-mañ-danvez, an argerzhad-oberiañ-mañ eget ar re all. Un arbenn klasel eo hemañ. En U.R.S.S. avat e c'hell bezañ priziet pe er par korrgantel, dre gontoù pep embregerezh jedet ent-distag, pe er par meurgantel, hini ar skourr obererezh, goude daskeitañ an embregerezhioù reñveradek hag ar re

zivigadek;

- peogwir e vez graet evel-se er riezou kevalaour araokaet. Ampr-estet e vez nevezadennoù estren (danvezioù gwiadell kevanaoz, mezelloù, h.a.), pe c'hoazh e vez graet meneg eus an doareoù-labourat estren evit broudañ an embregerion soviedel d'ober kenkoulz-all (ar gounez-erezh hag ar c'halvezderioù-dasparzhañ amerikan a vez graet dave dezho an aliesañ).

Spletoù ar c'hevansteuñviñ

Dav eo da gentañ diskouez un diac'hinad : klasket o deus Soviediz koazhañ d'ar muiañ parzh an didelezh en o armerzh, dre lemel c'hoari an nevid da skouer, hag ober eus an devoùoù armerzhel frouezh divizoù kemeret gant ar poell hepken; aes a-walc'h e tlefe enta an armerzh soviedel da veizañ, hag e gwir ez eo diaes-kenan. Savet ez eus bet meur a zamkaniezh evit displegañ e emdroadur hag e zisoc'hoù. An holl a anavez an displegadurioù eeunik, hogos kravezel, evel hemañ : berzh a ra U.R.S.S. er gevezadeg oablllestrel peogwir ez eo ur vro sokialour ha tonket eo ar sokialouriezh da drec'hiñ war ar gevalaouriezh evel an arc'hael Mikael war Satan. Damkaniezhoù istorelour a zispleg ez eo deuet U.R.S.S. a-benn da dremen a-dizh ha didruez dre holl bazennoù ar Reverzhi C'hreantel evel ma oant bet gwastadet araozi gant an armerzhioù kevalaour. Damkanourion all a laka e penndevoid bras-ter ar postadurioù, pe en enep an dibab poellek a voe graet eus ar gennadoù lusker.

Menegiñ a raimp amañ an teir elfenn m'en em gav an holl pe dost a-du evit ober anezho devoùderioù kentañ ar berzh armerzhel soviedel :

a) Embannet e vez dibaouez ar c'hreskiñ armerzhel, dindan an anvad "adeiladiñ ar sokialouriezh" evel pal meur ar riez. "Emañ an Unaniezh Soviedel o seveniñ ar c'hresk armerzhel evel m'edo Europa ar Grennamzer o seveniñ ar Gristeniezh. D'an div gevredigezh o c'hredo, o c'hloer, o Lez-Imbourc'h; ouzh an oferenn eo bet erlec'hiet ar steuñv, ouzh Keoded Doue ar Gomunouriezh klok" (22). An hevelep ensavioù-kreiz zo war un dro en o c'herz an aotrouniezh speredel hag ar galloud politikel. En o c'harg emañ diskouez ar finvez da dizhout hag en o beli bleniañ ar bobl war-du enni. An aberzhoù a c'houlennont zo bras, - met aotreet eur da atersiñ ha tu a vije bet hepto da ziorren ur vro er stad m'edo Rusia e 1917, - : steuñvoù stegnet

restricte
 (eleze jedet dre erverkañ (23) bepred an disoc'hoù uhelañ gallus); arboell bras rediet a-benn diraez feurioù-postañ uhel; arver an destrizherezh hag an atizadurioù arc'hantel a-benn dasparzhañ ar boblañs-labour diouzh ar gwellañ evit ar c'henderc'hañ; gwarezadur kenderc'h ar c'hevalaoù diwar-goust kenderc'h ar madoù-beveziñ; h.a.

b) Lamet eo bet an hualoù a c'halle herzel ouzh an emastenn, evel an arvar m'emañ an embreger frankizour war werzhañ e oberiadoù, evel eneberezh ar c'hweluniadoù, ar rin micherel, amloc'hted ar boblañs-labour.

utilitariste
 k) Arveret e vez an arc'hant hag an deskadurezh evel loc'hennoù da vuanaat ar c'hresk armerzhel : tregemmet e vez ar goproù, grataet arc'hoproù evit dedennañ al labourerion el lec'hioù ma'z eus ezhomm anezho, - ha seul aesoc'h ma n'eo ket seurt dispignoù skoilhet, evel en armerzh frankizour, gant an damant d'ar buzadoù; a-hend-all e vez meizet an deskadurezh en un doare arverelour (24) : unan eus hec'h amkanioù kentañ eo stummañ an obererion armerzhel a c'houlenn ar riez evit derc'hel gant he lusk.

-
- (1) MARX hag ENGELS, Manifesto Komunour, 1848.
 - (2) K.MARX, Dezvarn Raklun Gotha, 1875.
 - (3) K.MARX, Ar C'hevala I, 1867.
 - (4) Erounit v. erounezet, kas da benn (ur mennad, ur raktres, ur steuñv, h.a.). Erounezadur g., an erounit, disoc'h an erounit.
 - (5) Kevroz b., lodenn roet gant pep hini en un dispign boutin, evit ur garg voutin.
 - (6) K.MARX, An Ideologiezh Alaman
 - Erzerc'hañ?*
manifeste (7) Erzerc'hañ v., reiñ da anaout, diskouez splann. Erzerc'hadur g., an erzerc'hañ, disoc'h an erzerc'hañ.
 - (8) K.MARX, Dornskridoù 1844.
 - (9) Gwariadur g., e buhez ur strollad politikel, pelladur diouzh ar gelennadurezh pe al leviadurezh degemeret da reizh.
 - (10) Unanvevezerezh g., bevezerezh disoc'hel gant un unanenn-

genderc'hañ eus ar madoù pe ar gwazadoù he deus kenderc'het, da skouer bevezerezh o eostoù gant ar c'hounideion, annezañ en e di evit ur perc'henn. (Evit disoc'hel, sl. Emsav 11/306).

- (11) Ouzhpennad gwerzh, sl. Emsav 11/306.
- (12) Laz g., mad, splet, interest.
- (13) Roll ha kefridi ar c'hweluniadoù en amveziadoù an N.E.P., dezevadenn mouezhiet war atiz LENIN gant Poellgor-kreiz ar Strollad Bolchevik.
- (14) Gwironiezh b., skiant ar gwir; da ziforc'hañ diouzh gwiraouriezh, pleustrerezh ar gwir, er barnerezh da skouer.
- (15) Sl. An hely, Emsav 10/274, ha 277 pergen.
- (16) En eil pennad war an Armerzhioù kengladel e vo termenet spisoc'h ar c'heal a ditourenn ha roet skouerioù all.
- (17) Enlenet aog., lavarout a reer ez eo enlenet ur mad ouzh un arver pa ne c'hell talvezout nemet d'an arver-se; da skouer, ez eo ur c'hreion enlenet ouzh un arver hepken, skrivañ; ar c'hartennoù-lodennañ ne dalvezent nemet d'un arver, pourchas bara da skouer; er c'hontrol, ar moneiz a dalvez d'un niver divevenn a arverioù, setu perak e lavarer ez eo ur mad dienlen.
- (18) Barr-prenañ g.v., ar pezh a c'hell un den prenañ gant an arc'hant a zo en e gerz dre berzh e gorfoder; hv.: barr-pourchas g.v., pa ne lakaer ket e kont keal an arc'hant, - amañ, e degouezh ar c'hartennoù-lodennañ ne c'haller komz nemet eus barr-pourchas.
- (19) Ersaviñ v., db. un den pe ul loen, en em ren en doare-mañ-doare a-dal d'an darvoud-mañ-darvoud, d'ar saviad-mañ-saviad.
- (20) Diskleriadurioù a vo roet war ar mentelioù-danveziou en eil pennad a-zivout an Armerzhioù kengladel.
- (21) Emvasterezh g., stad ur strolliezh o vevañ diwar he barreg-zhioù hep eskemm gant an diavaez.
- (22) P.WILES, The Political Economy of Communism, 1962.
- (23) Eiverkañ v., gourc'hemenn (ur pal) da dizhout, (ur gefridi spis) da gas da benn.
- (24) Arverelour ag., o priziañ talvoudegezh an dud pe an traoù diouzh an arver a c'haller tennañ anezho.

